

Dindan form ar bara, er Zakramant kuzet

E mâ Jesus en Bethleem ganet :

Jesus hon Roue,

Guir Den ha guir Doue

Deut oll, deomp d'hen adori;

Gant Joseph ha gant Mari,

Deomp d'adori Mab Doue inkarnet.

Deomp gant feiz, esperanç, ha karantez guiriou

D'hen diguemer dre ar Gommunion :

En hor c'halonou

Puill e skuillo graçou

Deut oll, deomp d'hen adori

Gant Joseph ha gant Mari,

Deomp d'adori Mab Doue inkarnet.



ADESTE FIDELES



1

Tostait pobl fidel, deut laouen, da velet
En Bethleem, en eur c'hraou diskennet :

Roue an Aëlez,

Ganet gant ar Verç'hez.

Deut oll, deomp d'hen adori

Gant Joseph ha gant Mari,

Deomp d'adori Mab Doue inkarnet;

2

Gant hast ha levenez, heuilomp ar Bastored
A red d'ar c'hraou, o tilez ho derved :


Stouomp d'an daoulin

Dirak ar Mab divin.

Deut oll, deomp d'hen adori,

Gant Joseph ha gant Mari,

Deomp d'adori Mab Doue inkarnet.



Ni a velo kuzet dindan furm eur buguel
Ar Verb, guir sklerdet an Tad Eternel :

Dindan maillurou

Jesus-Christ hon Autrou.

Deut oll, deomp d'hen adori,

Gant Joseph ha gant Mari

Deomp d'adori Mab Doue inkarnet.

Doue eus a Zoue, sklerdet eus a sklerdet
Jesus gant eur guir gorf a zo guisket

Henvel e pep tra

Ouzomp deut da veza.

Deut oll, deomp d'hen adori,

Gant Joseph ha gant Mari,

Deomp d'adori Mab Doue inkarnet.

Frank, deomp oll, e tigor he zionvrec'hik tener
He zaoulagadik zo leun a zouçter :

Na peguen koantik

Eo Jesus buguelik !

Deut oll, deomp d'hen adori,

Gant Joseph ha gant Mari,

Deomp d'adori Mab Doue inkarnet.

Ar Verçhez ha Joseph a zo en e guichen
Hag ive an Eujen hag an Azen :

A zell truezus

Ous ar Mabik Jesus.

Deut oll, deomp d'hen adori,

Gant Joseph ha gant Mari,

Deomp d'adori Mab Doue inkarnet.

Evidomp eo ganet paour var foen astennet,
Deomp da bokat d'he izili sklasset :

Karomp oll Jesus

Meurbed karantezus.

Deut oll, deomp d'hen adori

Gant Joseph ha gant Mari

Deomp d'adori Mab Doue inkarnet

Kanomp gant an Aêlez, oll assembles, herio,
Ar *Gloria in excelsis Deo* :

Gloar, meuleudiou

Da Zoue en nenvou.

Deut oll, deomp d'hen adori,

Gant Joseph ha gant Mari,

Deomp d'adori Mab Doue inkarnet